

EBREL

gant Evnig PEN-AR-C'HOAD

Dont a rez va c'hoar ? An nevez-amzer
He deus kempennet an draonienn ;
Ne glevez ket bravat kanenn
A ginnig d'imp an evned dibreder !

.....

Deus da welet o lugerni
Ar gliz-beure war ar c'hlazenn,
Deus da selaou o hiboudi
Dre douez ar mein ar ruzelenn.

.....

Deus ganin ! An aezennig skanv
Zo eur blijadur da santout,
Deus da welet o tispakañ
Ar bleuniennou koant evelvoud.

.....

Dont a rez ? Ni a gerzo hed an deiz
War rec'hell ha traez hon aochou,
Hag eus al lanneg d'ar prajou
Dre vaeziou dibar hon Bro garet Bretz |

.....

Deus e disheol ar c'hoad bihan,
Pell diouz an holl dud hag an trouz :
Me laro d'it petra vouskan
He mignon d'an durzunell rouz !

.....

Deus ta ! Rag an nevez-amzer
Plijus evel ar yaouankiz
A zo ivez siouaz, berr, berr,
Ha ne zistro ket war he giz !

Evnig PENN-AR-C'HOAD.